


4.5.4.

p. 21° 3



## CANTIC SPIRITUEL

*En enor d'an Itron Varia a Rumengol,  
ur plaç santel a so en Escopty Qiterne  
e Pares tost d'ar Faou, var an ton  
Glac'har ar Verc'hes.*

116

**T** A T Map ha Speret, tri pherson an drindet,  
Me ho ped a greis ma c'hialon da roi din ar  
Speret,

Da composit ur c'hantic d'ar stereden brillant,  
Ar fourdelisen gaëra deimeus ar firmamant.

Ho Merc'h eo, tad eternal, ar Verc'hes benni-  
guet,

Pried ar Speret-Santel, Rouantez an Alet,  
Dreist an oll groaguez eürus hi so cavet din;  
Da veza mam da Jesus, hon redemptor divin.

Pa zeuan da gonsideri, guerc'hes sac' ha santel;  
An enor, ar meuleudi, hoc'h eus a bep amfer,  
Va speret a so distet da allout o discleria,  
Neme doc'h-hu mam santel, a zeuffe d'am assista.

Mæs ennoc'h leun a fianç em eüs antreprenet,  
Da publia ho crandeur etouez ar Vretonet,  
Ha discleria ar graçou accordet d'ar bed-oll,  
Dre graç Jesus hon Autrou, en Ilis Rumengol.

E pep lec'h eo enoret Mari hor mam santel,  
An oll a so exaucet nep so dezi fidel,  
Beza e deus certen plaçou ha dre he' fuiffañç,  
Elec'h ma ro he graçou gant mui a abundañç.

2

Hep offanfi plaç santel d'ar Verc'hes batiffet,  
En escopti a guerne, er bares a Hanvec,  
Eus un Ilis confâcret e gloar hac en enor,  
Da rouanez an Alet, guir vam hon redemtor.  
Guir dat devot d'ar Verc'hes, me ho ped gant  
enor,

Deut gant laouenidiguez da Ilis Rumengol,  
Da supplia mam Done da rei deoc'h ar yec'het,  
Ha da zivoall hoc'h ene dious laç an drouc-speret.

Mar d'ê bleffet hoc'h ene memes gant ar pec'het,  
Deut d'ar sourcen a vuez, hac ho pezo remed,  
Goulennet oc'h mam Jesus ar graçou necesser,  
Ma c'hellot chench a vuez, beza dezi fidel.

Mar d'ê ho corf attaquet gant an affliction  
Deut da Ilis Rumengol gant guir devotion,  
Ur plaç leun a viraclou dre c'hraç ar Verc'hes sacr,  
Mar e fedet a galon, ho soulageo timat.

Ar bevar c'horn ar c'harter e teu pelerinet,  
Da bidi Mam hor Salver gant ur galon barfet,  
Eus a Escopti Leon, a Dreguer, a Guerne,  
E teu an oïll dat devot da veuli Mam Doue.

Dre ar brut eus ar miraclou a ra guir remed tout,  
Dre graç Jesus hon Antrou, e deus an oïll gallout,  
Mar teu ar belerinet d'ê Ilis quen divin,  
Da ober an dro dezi memes voar o daoulin.

Un nombr bras a viraclou a ra ar Verc'hes sacr,  
En Ilis a Rumengol dre c'hraç Jesus he Map,  
Dre he ficour ha madelez em eus entreprenet,  
Discleria lor anezo etouez ar Vretonet.

Ar Verc'hes a Rumengol er bares a Hanvec,  
E deveus grêt a neve ur miracl caër meurbet,  
An oïll a so estonet oc'h e confideri,

A 2

3

N'en deus netra impossibl dec'hù Guerc'hes Vari.  
A dost dezi ur c'hrouadur, memes en oat dister,  
Pa voa ar velin o vala, a gouezas, er rivier  
Gant an dour e voa ruillet, ma zeas e toul ar bal,  
Ma fonge e voa flastrer allas gant an dour mal.

E dut gant cals nec'hamaor ha melconiet oïll,  
Et goastlas en un instant da'r Verc'hes Rumengol,  
Mari leun a garante, dre he dorn binniguet,  
A recouras vuez, er meas e ouz tennet.

Evit rei guir testeni e voa casset gant enor,  
Da dy ar Verc'hes Vari da Ilis Rumengol,  
Laquet er procession, gantàn, ur c'houlaquen,  
Evit meuli a galon ar Verc'hes souveren.

A dost d'ar c'hastel nevez ez eo din rapportet,  
E deus grêt guir Vam Doue ur miracl caër meurbet,

Dre an tan un tieguez a voa prest da berissa,  
P'o deus pedet ar Verc'hes da zont d'o assista.

Un ozac'h guir seivicher d'ar Verc'hes ben-  
niguet,

En em strinquas d'an daoulin d'ê fidi gant respet,  
Mari leun a garante a zigaças glao bras,  
Hep en devoa nep offaç, an tan prest da vougas.

Aman ez on c'hoaz c'harmer Guerc'hes mam  
a druez,

O compien ho carante e quevor ho pugale,  
Disquezet hoc'h eus ho pouvoir d'ur c'hrouadur  
daou vloa,

Oc'h ober en e andret ur miracl ar c'haëra.

Dre ur maleur ar brassa ur c'hoz ty o coueza,  
Ar c'hrouadur o tremen en em guet dindannà,  
Ar vein vras endro dezàn, ma fonget voa lazet,

C'hui a zevas d'affista, Rouanez an Alet.  
He dut a gommenças crial : Guerc'hes a remed  
tout,

Sicouret hor c'hrouadur, sourceen an oll-gallout,  
Ar vein a voa remuet, ha dre graç ar Verc'hes,  
E voa caver dizanger, dispos, leun a vuez.

Mari hor Mam souveren er mor couls hac en  
douar,

A den e servicherien dious anquen ha glac'har,  
Nombr bras a vartolodet e deveus preservet,  
Prestic da goll o buez, p'o deus hi invoquet.

Nombr bras a vatimançhou e deveus preservet,  
Hac an dud hac an madou dre he c'hraç benni-  
guet,

Ha bagou ha goberi e creis an tourmant bras,  
Pa beden hor mam Mari a obtene he c'hraç.

C'hoas ur c'hrouadur dister a Eicopri Leon,  
A voa couezet er rivier, va Doue pebez eston,  
Clasquet gant cals a glac'har, pa o deus invoquet,  
Ar Verc'hes a Rumengol, en istant eo caver.

Pa c'halsont ho c'hrouadur, hac en prest da  
vervel,

Ec'h implorfont a neve Mari hor Mam fantel,  
Da rei dezàn ar vuez dre e graç binniguet,  
Dirac ar gompagnunez o feden so clevet.

Un den a goulet Leon, a gollas ar c'herzet,  
So bet eis mis o vale var bouez dious vas-loacc,  
Grêt pris gant ar medecin evit trac'ha he c'har,  
Memes eus rez-e-c'hlin, va Doue pebez glac'har.

Un nesvez en e vele e teuas chonch deza  
E voa bet e Rumengol gueichal o pardona,  
Ha ma fant en e c'halon un desir quen ardent

Hac ur guir devotion d'ar Verc'hes oll buiffant.

Guir vam Jesus hon autrou, eme an affliget,  
Va ficouret em poaniou, Rouanez an Alet,  
Ha ma rañ an donæson ar c'haëra so em zi  
Da gaff da zeiz ho pardon evit hoc'h enori.

Mari leun a garante a bedas he map quer  
Da exaüci ar beden ar re e servicher:  
Receo a ras c'herzet dre graç guir remed oll  
Bet e bet oc'h e meuli en llis Rumengol.

Ne ouffe quet niverri nac o discleria oll  
Ar miraclou infinit a re guir remed oll,  
A nep a so guir gristen e fet a galon vat,  
Hi a bresant hor peden da Jesus-Christ he map.

Quen a gorf quen a ene quement so affliget,  
Deut da llis Rumengol gant ur galon barfet,  
Pedit-hi hac invoquet eno hor mam Mari,  
Ha renoncet d'ar pec'het evit pligeout dezi.

Sant Thomas ha S. Bernard daou servicher  
fidel  
D'ar Verc'hes mam da Zoue gant ur garantez  
fantel,

Hac a zeu d'hon affuri gant guir fidelite  
Birviquen na ve collet nep e fet nos ha de.

Couraich eta christienien, ha deut-oll gant enor  
Da velet hon Advocades da llis Rumengol,  
En em roet corf hac ene servicha Doue,  
Ha da bidi ar Verc'hes ar rest eus ho pue.

Quement ez so enoret ha caret gant Doue,  
Ma permet ganti ober herves e holonte;  
Quement graçou na vertu a zisquen var ar bet,  
A dremen oll dre zaouarn ar Verc'hes benniguet.

E mis eost ar pemzevet, an de ma pignas  
 En Fê gant an Alet gant solemnite vras,  
 E teu an oll dut devot gant guir devotion  
 Ima Iles Rumengol da gounit ar pardon.

Un Doue oll buissant a bermet dre e c'hraç  
 Ma ze d'ar Sul an Drindet e ma' ar pardon bras,  
 Er deiz-se e ve gulet ar bopl a Vreiz-lzel  
 O veuli gant joaüslet mam Jesus hor Salver.

En deiz-ze e gouneset Indulgeançou plenier  
 En Iles a Rumengol e ty mam hor Salver,  
 Oc'h ober gant guir glaç har ur confession vad,  
 Receo Jesus hor Salver gant ur fei admirabl.

D'an eizvet a guengolo, gouel e Nativite,  
 Ez eus ar memes pardon ebars er plaç santel-ze,  
 Memes peb gouel ar Verc'hes a so epad ar bloa  
 E teu an oll dut devot d'e visita gant joa.

Er solemnite santel eus a sul an Dreindet,  
 Quemet a ya d'ar pardon a so oll ravisset  
 O velet Jesus hon Autrou ebars er Sacramant  
 O c'hortos hor c'halonou gant carantez ardent.  
 Deut oll eta, christenien; deut oll a vanden-  
 nou

Da Rumengol da bidi mam Jesus hon Autrou,  
 Assuret oc'h da vera gant Doue pardonnet.  
 Mar bec'h guir servicherien d'ar Verc'hes biniguet.

Renoncet d'ho pechejou, hac en em arrollet  
 Ebars er Breutezou a so instituet

Da enori ar Verc'hes, evel ar roseta  
 A ren d'hor mam souveren un enor ar c'haëra.

Ne vanquet quet da larç bemdez ur chapelet,  
 Pehini eo e c'hurunen, un dizenez hannet;  
 Nep a zui da recita gant carantez barfet

A vezo guir servicher d'ar Verc'hes biniguet.  
 Itron Varia Rumengol, pedet, me ho suppli,  
 Evit an oll dut devot a visita ho ty,  
 Chasset an drouc speret hac e dentaron,  
 Ha presantet da Zoue bemdez hon oræton.  
 Guerc'hes gloriüs Vari, mam santel da Zoue,  
 Pa vezimp en heur hor maro, recevet hon ene,  
 Ha dre ho törn biniguet cassit-hi da repos,  
 Ha da veuli an Drindet e gloar ar Barados.

F. I N.



## ORÆSON DEVOT D'AR VERC'HES.

*Pehini a aller da gana var an ton : un desir bras  
 em eus hivisiquen, etc.*

**M**E ho salut, Mari, guir Rouanes eternal;  
 Dre ar memes meuleudi evel an Eal Gabriel;  
 O Guerc'hes gloriüs! mam santel da Zoue,  
 Pedit ho map Jesus evidomp nos ha de.

Merc'h an Tad eternal, a bep costes enoret;  
 Templ ar Speret-Santel, Rouanez Guerc'heset,  
 Mari, Advocades evit ar bec'herien,  
 Pedit evidomp oll an Drindet ar Souveren.

O guir Arc'h Alliañç! a behini oe ganet  
 Gant cals a eloquanç hor Redemtor biniguet;  
 E peb amser pedet evit ar bec'herien,  
 Ha recevet hepret hoc'h oll servicherien.